

C'hoari kartoù Istor-Geografiezh 3^e

kinniget ha savet gant Erwan ar Berr



Ar c'hoari-mañ a c'hall bezañ pellgarget war lec'hienn TES.
Gallout a rit moullañ, didroc'hañ ha plastikaat ar c'hartoù da sevel ur gwir c'hoari taol.
Ar skolajidi a c'hall c'hoari daou-ha-daou pe dre skipailh.

Ul liv disheñvel zo evit pep lodenn eus ar programm (istor : ruz, orañjez, glas sklaer ; geografiezh :
gwer teñval, gwer sklaer, glas teñval).

Mod-implij

1. Ar pakad kartoù zo e-kreiz an daol.
2. Ur skolajiad a gemer ur gartenn hag a lenn ar goulenn a vouezh uhel ur wech pe ziv.
3. Ar skolajiad enep a c'hall reiñ ur respont diouzhtu. Tri foent a c'hounez ma'z eo mat ar respont.
4. Ma ne oar ket e c'hall goulenn un ditour ouzhpenn hag un eil.
5. Ma ro ur respont mat goude un ditour e c'hounez daou boent.
6. Ma ro ur respont mat goude an eil titour e c'hounez ur poent pe hini ebet ma'z eo faos ar respont.
7. Goude-se e teu tro ar skolajiad enep da dennañ ur gartenn.

Penaos implijout ar c'hoari a-bell ?

War lec'hienn TES e kavoc'h div fichennaoueg, pep hini anezho gant un hanter eus ar c'hartoù. Pep skolajiad.ez a c'hall pellgargañ unan eus an div (fichennaoueg A pe B). Dre Skype, WhatsApp pe n'eus forzh peseurt lec'hienn eskemm e c'hallont c'hoari daou-ha-daou pe div-ha-div. Ar goulennoù a c'hall bezañ kinniget en urzh pe en dizurzh.